



*CANTIC Spirituel var ar boan en devoue  
hor Salver o touguen e Groas.*

**P**ec'heur, pec'heur, implic' da zaoulagad  
Pe var hini e ranquo da Salver  
Souffr ar maro e creis etre daou laer.

Guelet a ra prononcet ar Setanç,  
Mervel a renq Jesus en ur potanç,  
Chetu e aman, pec'heurien obstinet,  
Calonou dir, an douc'hu quet rannet?

Tostait eta, tostait, ô va Salver!  
Cheta amâ ur beac'h a vo pounner,  
Hirio e ret e teuac'h da zouguen  
Var ho tiscoas, crimou ar pecheurien.

Chetu amâ preparêt an Auter  
Pe voar hini e renquot, va Salver,  
Offr d'ar Justiç eus ho Tad Eternel  
Ar Sacrific' eus ho puhez santel.

Cregui a ra Jesus en e Groas,  
Diplaç a ra dindanni gant poan vras;  
Allas! crena a ra e oll memprou,  
Eleac'h sicour n'en deus nemet tauliou.

Tyrantet criz, na scoit quet Jesus,  
Sellit ar stat eus e Gorf precius,  
N'en deus mui na nerz, na puissanç,  
Mervel a renq dindan un fort potanç.

Tad Eternel, Doue Oll-puissant,  
Consideret pe quer bras eo an tourmant  
A soufr ho Mab gant an oll bourrevien,  
**A**

Lofquit ar foultr eus an Eê voar ho fenn.

C'hui oc'heus bet delivret Daniel

Eus ar c'hriffou al leonet cruel :

Chetu amâ ho Mab persecuter

Gant bourrevien goaz evit leonet.

N'o devezs quêt a druez o velet

An Oan douç gant e Croas fatiguet ,

Tat Eternel , digacit hoc'h Ælez

Evit e zelvra , ma chommo e buhez.

Ælez an Eèn , disquennit en douar ,

Evit disqueus da Jesus ho glac'har ;

Me ped aman an douar hac an Eê

Da zeplori tourmanchou Map Doue.

Coueza a ra Jesus dindan e veac'h ,

Agos maro e velan e diou vrac'h ,

E divesquern a teu da fazia ,

Hac e galon , fiouas , a vanq deza.

Mary , Mary , n'oc'heus-hu quet clevet

Pe da varo eo ho Mab condaunet ?

Autrou-Doue , homma er galonat ,

Chetu e amâ beuzet en e goat.

Hastit affo , Guerc'hes Sacr , glac'haret ,

Mar oc'heus c'hoant ur veach c'hoas d'e velet ,

Allas ! dija ema prest da vervel

Dindan e Groas gant tourmanchou cruel.

Mam a glac'har , tener e ho calon ;

Ouc'h e velet e ranno emeus aoun ,

Mar oc'heus nerz en oc'h anquen garo ,

Comsit ounta , ema agos maro.

Va Map , va Map , a c'hui a so ase ,

C'hui n'oc'heus quet meritet quement-se.

Allas ! va Map , c'hui eo an Innoçant ,

Ne de quet c'hui a verit an tourmant.

Lavaret mat en deoa Simeon  
 E tliac'hu affligea va c'halon,  
 Ne allan mui, va c'halon a vanq din;  
 Grit din mervel echars ho treit divin.  
 Tad Eternel, penaus e c'hillin-me  
 Beva pelloc'h hep guelel Map Doue,  
 Am boa douguet nao mis em entrailloù;  
 Delivrit-èn ha roit din e poaniou.  
 Mam affliger, n'o peo quet ho requet,  
 Ho Map Divin e a so condaounet;  
 Ret eo deza mervel en ur potañ  
 Var ar C'halvar evit hon delivranç.  
 Sivit, sivit, va Salver binniguet,  
 Ho pet couraich, eil Pherfon an Drindet;  
 Ar Croas-se a renquit da zouguen  
 Voar ar Menez, ha mervel gant anquen.  
 Lelleac'h ema Simon ar Cyreneen,  
 Evit ma tuy da sicour e douguen?  
 Symon, Symon, presantit ho tiouascoas  
 Evit douguen ur pennic eus ar Groas.  
 Me oar erfat e quafet dismeganç  
 Beza contraign da zouguen ur potañ;  
 Mas goude-se o pezo recompanç,  
 Er Barados e viot en e bresanç.  
 Clevit, clevit, arreit pec'heurien;  
 Guelel Jesus etouez ar vourrevien;  
 Sellit e Gorf carguet a c'hoplion,  
 E laç so leun a fanc ha crachadou.  
 Ha ne deus den a roe e vouchouer  
 Evit sec'hi e visaich d'hor Salver:  
 Veroniq paour, n'emedoc'h a rahe,  
 Ne gaffeur den da ober quement-se.  
 Tostait eta, deut gant ho mouchouer

Da sec'hi'r fanc dious bifaich hor Salver :  
 Plac'het yaouanc , eleac'h mouchouerou  
 Roit da Jesus a galon ho daezlou.

~ Pec'heur , pec'heur , en em string d'an daolin ,  
 Gra deza offr d'e douguen voar da guein :  
 Lavar deza , Jesus Salver ar bet ;  
 Roet dia ar Groas , m'emeus-hi meritet.

Seul ma vale , seul faticoc'h eza ,  
 E c'houliou ne cessont o vouada ;  
 An douar , ar vein , e gorf hac e zillat  
 A so rusiet , siouas , gant e c'hoat.

C'hui tut , pere a vale dr'en hinchou ,  
 Ha c'hui oc'heus guelet an feurt poaniou ,  
 Han de quet guir , biscoas var an douar  
 Ne velas den quement all a glac'har.

Coueza a ra d'an douar adarre  
 Quer fatiq eo ne hel mui bale ,  
 Mancout a ra e galon d'hor Salver ,  
 Coueza a renq dindan ar Groas pouer.

Bugale eriz ha talet , deut amâ ,  
 Deut da velet ho Tad peñaos emâ ;  
 Pa ve quer eriz ho calon hac ar mean  
 E ranno sur o velet an fort poan.

Me a supli an oll guitibunan  
 Da arreti da velet ar poan  
 A souffr Jesus dindan poues ar Groas  
 A so couezet varneza gant strong vras.

Clevet a rear e esquern o stracal ,  
 E foula reont eguis un aneval ,  
 Eleac'h sicour a sevel en e sa ,  
 En em stringuont gant arraich varneza.  
 & Ma permetac'h , Tad Eternel , guene ,  
 Embe c'hoant bras d'en em glem eus an Eé ,

Pehini a les goaltreti va Salver,  
 Mas pa zon caos n'ouffen lavaret guer.

Pliche gant Doue ma allen caout ar graç  
 Dã finissa va buez voar ar plaç,  
 Pa ne allan ober sicour ebèt  
 Da va Jesus a velan affigeter.

Pliche gant Doue ma ranne va c'halon,  
 Ha n'am be inui nep consolation:  
 Autrou Doue, petra rin-me, pec'heur,  
 Beza caos da ur quer bras maleur?

Allas Jesus! ne quet achu ho peach,  
 Beza oc'heus c'hoas da souffr cals a outraich;  
 Casscat ouc'h gant an oll dut ho bro,  
 N'ho pezo peoc'h quen na viot maro.

En em sicour a ra guella ma c'hell,  
 Pa na dosta den d'e sicour da sevel,  
 Ar vearrevien a string gant violanç  
 Voar e ziouscoas adarre ar potanç.

Ne quet contant an Tyrantet cruel,  
 Ma na ellont e velet o vervel,  
 Ne de netra quement en deus souffret  
 Ma n'er guelont er Groas crucifiet.

Gant ar Scribet, ar Pharisianet,  
 Gant al laeron e Jesus assistet,  
 En e raoc e son an trompillou  
 Da publica en deus cals a grimou.

E facha rear gant querdin e bep tu;  
 Ne c'haveur quen partout nemet an hu  
 Voar hor Salver eguis var ur c'hi clan,  
 A ners o c'horf e scoont oll voarnezan.

Ma emauc'hu, groaguez Jerusalem,  
 Me oar erfat n'er c'hlevit quet o clem,  
 Mas e boaniou a so quer surprenant,

Ma tleffac'h oll mervel gant nec'hamant.

Gouelit eta, gouelit leiz ho calon,  
Chetu amâ sujet da ober caoun,

Ha mar gouelit, gouelit ho pec'hedou,  
Pere so caos eus e oll tourmanchou.

Deut, Madalen, deut gant oc'h onganchou  
Evit frotta ganto e gouliou :

Chetu amâ ho Mastr prest da vervel,  
Gant ho cuchou sec'hit e dreit santel.

Erruet eo e quichen ar Menez  
Gant cals a boan evit coll e vuez,

Amâ e renq ober un effort bras  
Evit pigna ouc'h creac'h gant e Groas.

Tad Eternel, ha'n de quet contantet  
Ho Justic' c'hoas gant ar Goat biniguet

En deus scuillet Jesus ho Map fidel  
Ha possubl ve e ranque mervel.

Silvidiguez ar bet universel

A c'houlen c'hoas, eme'n Tat Eternel,  
Ret e dam Mab mervel en ur potañç,

Pe e choummo an den hep dilivranç.

Adieu eta, Salver ar bet,  
Ret eo mervel pa ze roet an arret,

Tosta, Bourreau, gant an tachou houarn ;  
Cheda Jesus oc'h offr dit e zaouarn.

Me ped an douar hac an clemanchou,  
Me ped an heul hac ar steredennou,

Me ped al loar, an oll crouadurien  
Da ober caoun pa na ra quet an den.


Me a garre, va Jesus, gant daezlou  
Goalc'hi ho Croas hac oc'h oll Gouliou ;

Me a garre dre vir affection

E ve rannet gant glac'har va e'halon.

Mil bennos deoc'h, va Jesus, a bedan,  
 Me a fo sur obliget deoc'h breman,  
 Pa n'affe c'hui me a vige daounet,  
 Esper ameus pelloc'h ne vezin quet.  
 Me am bezo ar rest eus va buez  
 Memor ato eus va silvidiguez,  
 Songeal a rin bemdez a parfetet  
 Er pez ameus en deis hirio guelec.  
 Me a c'houlen digueneoc'h, va Salver,  
 Graç da dremen ar rest eus va amfer,  
 D'ho servicha e peb fidelite,  
 Ha caout er fin Barados d'am enc.

F I N.



*AN ANGELUS E BREZONNEC.*

**A** Bers Doue hor Mæstr hac hon Autrou,  
 Eo deut an Æal da anonç ar c'helaou  
 D'ar Verc'hes sacr penaos oa destinet  
 Da veza Mam eil Pherfon an Drindet.  
 Me ho salud dre guir devotion,  
 O Guerc'hes sacr, hor Mam hac hon Itron,  
 Dre ar salud a glesoc'h gant an Æl,  
 Deomp d'e glevet abers Doue Eternel.

*An Eal.*

Me ho salud, Mari Guerc'hes antier,  
 C'hui fo choaset evit Mam hor Salver,  
 C'hui so yves ramplisset a c'hraçou,  
 Gueneoc'h bepret emedi an Autrou.

*Ar Verc'hes.*

Me so da Zoue bepret servicheres,  
 Ne doun quet din da veza e Magueres,  
 Ra vezo great hervez ar c'homfou-se,  
 Prest oua gant joa da ober e volonte.

Guir Vap Doue so en em incarnet,  
 Evidomp oll eo en em abimet,  
 Evidomp oll eo deut var an douar,  
 Dre e vadelez d'hon tenna a c'hlac'har.

*Santes Elizabeth.*

Benniguet ouc'h entre an oll Gragues,  
 Ha benniguet eo yves ar froez  
 Oc'heus douguet epad nao mis antier,  
 Jesus eo hor Barner hac hor Salver.

*An Ilis Santel.*

Santes Mari, pa zouc'h Mam da Zoue,  
 Pedit breman, pedit da bep mare  
 Evidomp oll pec'herien bet ingrat,  
 Ma varvimp oll gant e graç e stat var.

Tri phoent caer so en Orason-man,  
 An Æal Gabriel en devez gret ar c'henta,  
 An eil varlerc'h Santes Elizabeth,  
 Hac an trede an Ilis benniguet.

Christenien oll e tleomp teir guich bemdez  
 Dr'en tri poent-man saludi ar Verc'hes,  
 O lavaret ANGELUS hac AVE

Nos ha mintin, ha da creis deiz yve.  
 Evit pidi ar guir Vam a druez  
 Da veza bepret hor guir Advocades,  
 Da suplia tri Pheron an Dreindet,  
 Ma vezimp oll en hor fin curunet.

A M E N.